

Kantik Plounez.

Modernnaet eo bet an doare-skriva.

D'an eil sul a viz Goeure e vez greet ar pardon.

E-pad ar brosesion e veze kanet ar hantik-mañ :

Itron Varia Gwir zikour

(Plounez)

Diskan

Itron Varia Gwir Zikour

Eur zell war ho pugale,

A beb droug, a beb enebour,

On diwallit noz ha de'

O ! Mamm dener, a-raog dim-ni,

On zud-koz 'zo deut amañ,

'Vid ho pedi, 'vid ho meuli,

Ha daoulinet, da ganañ.

Bihanig, war breh ma mamm ger,

Me 'oa douget d'hoh iliz.

Ha stouet dirag hoh aoter

Mari ! ger kenta a laris.

Mari ! ano karantezuz,

Steredenn, ha rouanez,

Ha mamm bur ar Mabig Jezuz,

On Mamm, hag on fatronez.

Beillit, beillit, O ! mamm garet,

Beillit war on bugale :

Ha mirit na vent mastaret

Gand kenteliou dizoue.

A beb droug, mirit o ene

Gwenn-kann, a-raog azezañ,

Ouz taol Jezuz, gwir Vab Doue,

Da rei o halon dezañ.

Pa dilezo dornig e vamm,

Eneb da beb enebour,

Bezit evitañ eur gwir vamm,

Itron Varia Gwir Zikour.

Sellit Mari, ar vamm ger-ze,

Ha selaouit he fedenn :

Stouet e' dirazoh gand fe'

O ! dizammet heh anken.

Ar bugel he-doa bet douget
Ha gouestlet deoh, mamm dener,
A zo en pell bro divroet.
Hen zikourit en dañjer.

War vor, hag ivez war douar,
Dre oll risk, poaniou, kleñved :
Bezit truez, mamm a hlahar,
En peb leh on zikouret¹.

‘Kreiz an tan, ha ‘kreiz ar mor don,
Gwasket gand an enebour,
Pegen nerzuz lar ar galon :
« Itron Varia Gwir Zikour ».

‘Vid e Zoue, evid e vro,
Liez ‘red gwad ho pugel,
Mamm ha Patronez a halvo,
A-greiz-kalon, ‘n eur vervel.

Deiz ho Pardon, O ! rouanez,
Me a wel ho pugale,
O teredeg gand levenez,
D’hoh enori Mamm Doue.

Ganim, tud a vor, soudarded,
Heb aon rag pep treitour,
‘Vo kanet gand enrz, joaiusted :
« Itron Varia Gwir Zikour ».

Pa halvo Doue ho pugel,
O ! neuze, mamm a drue’,
Diskouezit ez oh mamm fidel,
Degemerit ma ene.

‘N ho kichenn ‘n pad an oll amzer,
En-dro din ‘r re a garan ;
En neñv, me a gano seder,
Ar hantikou ar haerrañ.

D’ar bemp a viz even 1901.
(Bet skrivet gand a oa person Plounez).

¹ on zikouret : on zikourit (-et, stumm Bro-Ouelo, e plas -it, stumm lennegel).

Parrouz Plounez

D'an den evuruz Yves a Gervizic

Batizet e oa bet Yves de Kervizic e Plounez d'ar 6 a viz Ebrel 1761. Kure e oa bet e Saint-Jacques-du-Haut-Pas (e Pariz). Dibennet e oa bet d'an 2 a viz Gwengolo 1792. Beatifiet e oa bet d'ar 17 a viz Here 1926. Eun daolenn anezañ a zo e iliz Plounez).

Diskan

Den evuruz a Gervizig

Merzer leun a vadelez

Grit ma vo on feiz birvidig

Evel feiz tud koz Plounez !

Dsket gand ho mamm, bugelig,

C'hwi 'bede 'vel eun Êlig,

Pa deuh d'Iliz ho parrouz

Ken fur bepred, ken didrouz.

Ti ho tud, divlamm, c'hwi 'veve,

Al labour deoh a blije,

Skuillit hirie ho madelez

War ho kenvroiz Plounez.

En kêr Bariz bet beleget,

Eun Êl 'oah deuz an aoter,

Nag a dud hoh-eus frealzet

Gand ho komz dous ha tener.

'Uz d'ar vro, pa zavas kourmoul

Pa strakas ar hurunou,

Feiz 'n ho kalon, 'chomeh sioul

O soñjal 'barz an Neñvou.

N'eus ket tenerroh karante'

'Vid rei testeni ar gwad

Evid anzañ gwirion Doue

On Dasprener hag on zad.

Gand an hailloned oah tapet,

Skourjezet, muntret, pilet

Hag ho kwad, O ! den evuruz

'Oa skuillet evid Jezuz.

Deuz lein an Neñvou, diwallet²,

C'hwi bremañ 'kichenn Doue,

E-kreiz an avel dirollet

Eneou on bugale.

² diwallet : diwallit.

Lakait ar yaouankiz kempouez,
Mirit fur parrouz Plounez.
D'ho kenvroiz roet ho pennoz
D'arruoud er Baradoz.

Grit diwan' en on halonou
Ar feiz kreñv ar garante',
Ha lakait en on menajou
Ar peuh, an doujañs Doue.

Aliez ni rey on fedenn
Ouz ho tron, ouz ho skeudenn
Evid lared deoh trugarez
Ha goulenn grasou nevez.

D'ar 15 a viz Even 1927.
N'ouzon ket gand piou e vefe savet ar hantik-se.